

Skol-hañv 2012

Pegement ?

(Priz evit ar c'hentelioù, boued ha lojeiz)

- **250 €** e kousto pep prantad staj. Ret eo paeañ an hanter a-raok dont ha kas ar chekenn gant ar follenn-enskrivañ da gKEAV.
- **220 €** e kousto ur prantad evit ar studieren hag an dud dilabour ; kas an hanter gant hoc'h enskrivadur.

Un niverenn stummadur dibaouez a zo gant KEAV.

Penaos e vo labouret ?

Tro a vo da gas ar gaoz gant brezhonegerien eus Bro-Leon hag a vo displeget ganto perzhioù dibar ar c'horn-mañ eus ar vro en ur vont da welout lec'hioù anavezet tro-dro da Lesneven, hag, evel-just, un dro-velo dre ar vro Bagan, lakaet war-sav nevez zo, gant Ti ar Vro Lesneven.

En tu all eus an degouezhioù-se hag a vo boutin d'an holl stajidi e vo ivez prantadoù labour gouestlet d'ur roll temoù hag a vo goulennet digant ar stajidi choaz unan anezho : "brezhoneg er gêr", "ober anaoudegezh gant un embregerezh eus ar vro", "bed ar vezhinaerien" ha "istor Lesneven hag an tro-war-droioù".

Skipailhoù bihan a vo savet diouzh an temoù dibabet gant ar stajidi.

E-kerzh an troioù-se e c'hello pep skipailh stajidi sevel goulennoù, kemer poltreoù ha dastum peadra da labourat a-stroll evit sevel ur pennad rentañ-kont hag a vo presañtet d'ar stajidi all e fin ar sizhun.

KEAV - 22 hent Moulouen 29000 Kemper
pgz : 02 98 95 59 31
www.keav.org / keav@wanadoo.fr

KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERIEN

Evel en holl stajoù savet gant KEAV, e vo kinniget d'an dud gwellaat o live yezh dre vevañ e brezhoneg penn da benn ar sizhun, en holl degouezhioù ar vuhez pemdez kenkoulz hag en obererezhioù liesseurt a vo kaset a-hed ar staj. Er sizhun staj-mañ ne vo ket savet a gentelioù renket dre o live. Pouezet e vo war an deskiñ dre ober : an eskemmoù etre ar stajidi a-hed an deiz, pe er strolladoù labour m'o-do lakaet o anvioù peotramant gant ar vrezhonegerien eus ar vro.

KEAV zo ezel eus Kuzul ar Brezhoneg

KENTAÑ HA DIWEZHAÑ EVEZHIADENN E GALLEG

Le camp d'été de KEAV, c'est quatre-vingt, cent personnes heureuses de se rencontrer pour entendre et parler breton. Pour chacun, le faire c'est un choix, un plaisir : pour respecter cette volonté commune, chacun s'efforce de s'exprimer uniquement en breton.

Cet effort est également un élément indispensable de l'apprentissage. Le stage de KEAV est connu pour cela. En s'inscrivant, chacun est donc conscient de l'engagement auquel il souscrit.

Le breton est la seule langue utilisée par tous au cours du stage.

Le stage ne peut profiter véritablement qu'aux personnes ayant des bases élémentaires suffisantes du breton. Nous rappelons qu'il existe des stages pour débutant à la même période.



Skol-Hañv 2012

aozet gant

Kamp Etrekeltiek

Ar Vrezhonegerien

e skol Labour-douar

an IREO (hent Plouider)

LESNEVEN

26-31 a viz Eost

NEVEZ

Evit mont war-raok
gant ar brezhoneg.
Evit ober eus ar brezhoneg
ur yezh pemdez.

Setu amañ da heul an temoù-labour a vo goulennet digant ar stajidi choaz unan anezho :


• Brezhoneg er gêr (gant Divskouarn)

Brezhoneg er skol 'zo mat, met re alies e chom e toull an nor ha ne dremen ket treuzoù an ti.

Fellout a ra deomp skoazellañ an tadoù hag ar mammoù a oar un tamm brezhoneg ha na gredont ket ober ganti evel yezh ar gêr c'hoazh, abalamour ma kav dezhe ez eo re dreut o anaoudegezh. Penaos ? Dre bourchas dezhe un nebeut ostilhoù, aozañ prantadoù eskemm lec'h vo roet an tu d'ar gerent, da gomz etrezo, gant skolaerion, gant tud a zo o micher ober war-dro ar vugale, gant familhoù a zo desavet o bugale e brezhoneg ganto. Setu pal ar rummad kentelioù-se.

Labouret e vo war demoù tost ouzh ar vuhez pemdez, aozet e vo pourmenadennoù, c'hoarioù a-stroll. Asamblez gant ar stajidi all e vo kaset ar stajidi da weladenniñ lec'hioù anavezet tro-dro da Lesneven hag a vo displeget dezho gant brezhonegerien eus ar vro.

Degemeret e vo familhoù, kerent ha bugale, lod anezhe implijet ar brezhoneg ingal ganto dija, lod all ha na gredont ket implijout ar pezh a ouzont, asamblez gant tud divugel evit c'hoazh, met c'hoant gante da zezevel o bugale e brezhoneg.



• Ober anaoudegezh gant un embregerezh eus ar vro

Evit eskemm war ar vuhez labour peotramant an ekonomiezh e brezhoneg netra gwelloc'h eget mont da welout a-dostoc'h penaos e ya an embregerezhioù en-dro.



Er rummad-se e vo kinniget d'ar stajidi ober anaoudegezh gant un embregerezh eus ar vro. Goude bezañ taolet ur sell war lec'hienn web an embregerezh ec'h aio ar stajidi da welout anezhañ ha presañtet e vo dezho ar produioù, an dud hag ar micherioù, an teknikoù implijet, ar mont en-dro, an istor hag an emdroadurioù...

Gant an tamm gwel-se e c'hello ar stajidi sevel goulennoù a beb seurt ha daspugn ar pezh a vo ezhomm evit sevel ur pennad war an embregerezh-se hag a vo presañtet d'ar stajidi all e fin ar sizhun. Prantadoù labour a vo lakaet e-kerzh ar sizhun evit sevel ar pennad-se hag eskemm pelloc'h.

• Bed ar vezhinaerien

A-viskoazh zo bet tennet gounid eus ar bezhin war an aod e Bro Leon lec'h ma vez devet d'ober iod. Ma'z eo aet war zigresk niver ar vezhinaerien a vloaz da vloaz ha cheñchet o doareoù da labourat, bev-buhezek e chom c'hoazh ar vicher-se war aodoù Lannildud, Enez Molenez ha Plougerne. Hiziv e vez tennet diouto danvezioù gludennek d'ober boued, peotramant produioù koantiz pe louzoù.

Ur vicher dibar e Breizh eo bet, krouet diwarni ur mod da vevañ ken dibar all. E mirdi Plougerne e vo kavet displegadennoù e-leizh war an doare da labourat gwechall hag a-vremañ ; graet e vo

anaoudegezh gant tud eus ar vro hag a zo bet war ar vicher bezhinaerien gwechall ; displegadennoù vo roet deomp war an doare da besketa war ar c'horejoù.



• Istor Lesneven hag an tro-war-dro

Ur vro dibar he fersonelezh eo bro-Leon hag e Lesneven e vo lec'hiet ar staj, unan eus ar plasoù koshañ eus ar vro-se : stank eo an darvoudoù a c'heller menegiñ eus ar ragistor betek hiziv, dre mare ar Romaned, ar Vretoned kozh, ar grennamzer, an dispac'h bras, an trede Republik hag an daou vrezel-bed.

Tennet e vo o mad gant ar stajidi eus an troioù dre ar vro a vo kinniget dezho a-hed ar sizhun ma c'hellint selaou ha dastum an testenioù degaset gant ar vrezhonegerien eus ar vro : gwelout an traoù hag an dielloù dispar diskouezet e mirdi Bro-Leon e Lesneven, peotramant mont pelloc'h war degouezhioù ar brezel-herzh Breizh pe war istor iliz kaer Intron Varia ar Folgoad abaoe ma oa krouet gant Yann IV a Montfort betek pardonioù bras an amzer a-vremañ, kompren gwelloc'h dre welout Meneham petra a oa buhez gwechall an dud vunut war ar maez ha war an aod.

